

ARZ

Jil Daniel

PLEASE, SAVE THE DATE! || PHAKT

Roazhon, deroù ar bloavez. E karter ar ChouLoumer, nepell eus plasenn Charlez De Gaulle, e kaver un nebeud lec'hioù gouestlet d'an arz a-vremañ. War blasenn ar ChouLoumer, etre ar stalloù hag ar sinema, amezek d'un trocher blev, e vez staliet Lendroit, un diskouezva-levrty gouestlet d'an arzoù moull. Eno e kaver ar mare-mañ *Please, save the date!* savet gant Marie Boivent, keleñner war an arzoù er skol-veur. An diskouezadeg-se a zo un dastumadeg deiziadurioù saver gant un ugent arzour bennak. En o zouez, Claude Closky a embann gant Lendroit un deizadur kenwerzhel, da vrudañ an diskouezva. Matthieu Saladin a sav un deiziadur an emsavadegoù, gant deiziadoù harzoù-labour, reuelioù pe manifestadegoù taer e plas anvioù ar batromed hag ar goulioù relijiel, met iverz Brendan Fowler ha Andrea Longrave-White. Harold Ancart, Sophie Naess ha Carmelle Safdie, Marie-Amélie Procher, hag all, a c'hoari gant ar skeudennou a gaver da gustum war an deizadurioù : bokedoù, maeziadoù, mareadoù ar bloaz, loened an ti, hag all.

Un diskouezadeg fentus a-wechoù, souezhus a-hend-all hag un abeg mat da vont da deurel ur sell d'al levrioù all gwerzhet gant an diskouezva.

Un tammig pelloc'h e kaver un diskouezva all, ar Phakt, lec'hiet en ur blasenn guzh eus ar charter, e kreizig-kreiz an tourioù. Amañ e vez kentelioù arz evit tud ar charter hag er sal gentañ ez eus bet staliet un diskouezadeg nevez ar sizhun dremenet. Hounnezh a zustum oberennou ar chenstroll *Le Marché noir*, da läret eo

arzourien ar pevar strollad a ra war-dro *Le Marché noir*, ur gouel aozet bep bloaz da vare an distro-skol evit diskouez oberennou grafek savet gant strolladigoù grafourienn hag arzourez Europa. Er Phakt e kaver neuze oberennou savet daou-ha-daou. Pep hini eus an arzourien o vezañ bet o labourat en ur gemen harp war oberenn un den all eus ar strollad. Ar re a anavez labour an dud ne welint netra souezhus met un taol-sell dedennus war stad al labourioù hag an enklaskou nevesañ graet gante.

